

Finvezoù diwezhañ ur barzh



Naig Rozmor ha
Charlez ar Gall evit
Ild Koller an Erminig
e Gwitéreg, e 1998.
sk. © KL



Skrivañ ur pennad diwar-benn levr Naig Rozmor, *Finvezoù diwezhañ ur barzh*, n'eo ket gwall aes evidon. Abaoe va yaouankiz pellañ ez on bet maget gant he barzhonegoù, he fezhioù-c'hoari, he zroioù-lavar.

Pa oan bihan-sot e plije din sellet outi, klevet anezhi o komz ur brezhoneg leun a virvilh awenet gant Bro-Leon, ar mor hag an douar.

Ganti em eus desket bezañ “seizh ki” evit plijout d’ar baotred peotramant lakaat ar gitell war an tan evit evañ ur banne te. Ganti em eus graet anaoudegezh gant barzhed evel Rabindranath Tagore. A-drugarez dezhi em eus meizet pegen bev ha pegen brav e oa liv va brezhoneg, hini Leon. “E-unan eo deuet ar brezhoneg. Anat e oa. Lammat a rae dindan ar bluenn. Ar gerioù a nije ! Dont a rae evel-se.”

tremen a ra pep tra avat. Ouzh-penn 90 vloaz eo Naig bremañ ha paket eo gant kleñved Alzheimer abaoe un nebeud bloavezhioù. Profañ a ra deomp gant *Les fins dernières d'un poète, Finvezoù diwezhañ ur barzh, traits de plume, traits de pinceau* he oberenn ziwezhañ avat, un oberenn zivyezhek troet e brezhoneg gant Bob Simon diwar ul labour bet kaset da benn gant ar psikologourez Chantal Gombert. Kinklet eo bet al levr gant Jean-Pierre Guiriec.

LIVAN HEC'H AWEN

Savet eo bet an oberenn diwar ul labour enklask gant Chantal Gombert abaoe daou vloaz, un oberenn arzel da vat ha testeni ur varzhez. Pa oa bet kroget an darempredoù gant an div vaouez e oa oadet Naig a 88 vloaz, siwazh eviti e oa kizidik ar yec'hed ganti. “*Er mare-mañ ez on dismantret gant ar c’hleñved. Diframmet on. Pa vez goulennet un dra bennak ganin, ne ouzon ket ken e pelec’h e kavin an dra-se !*”. Bevañ a rae en ur bed n’en

doa nag amzer dremenet nag amzer da zont, sparlet e oa en ur bed e-lec’h ma ne oa plas ebet evit ar c’hrouiñ en doa renet he buhez-pad. Divizet e voe neuze gant Naig kas ur stal-livañ evit boueta hec’h awen. Diouzhtu eo bet frouezhus al labour o kas anezhi en-dro en amzer vremañ evit ar prantad livañ. Deuet eo bet brav an disoc’h gant an awen o tiwan endro hag al levr o tont war wel. E berrgomzoù eo un testeni boemus ha fromus, leun a spi evit ar re glañv gant Alzheimer.

TEC’HOUT EVIT BEVAÑ

A-drugarez d’ar barroù-livañ e kont deomp Naig he soñjoù, hec’h eñvorennoù, he zrivliadennoù. Diskouez a ra deomp pegen efedus eo bet he frantadoù-livañ. “*An dorn astennet a c’hortoz an awen. Ar c’hreionoù-mañ a zo gouest da reiñ buhez din en-dro ! Mont a ra gwelloc’h ganin, n’ou ket e’it krediñ va-unan ! O koll nerzh e oan, enkrezet e oan... Laouen on gant ar pezh ’m eus adkavet rak ma steuziez e varvez ! [...]* Va dieubiñ a ra ar varzhoniezh.

Amañ ec’h en em santan serret evel en un toull. [...] Ganez, gant ar pezh a ginnigez e tec’han kuit”. N’int ket tec’hadennoù gwir marteze, met bez’ ez eus diouto ha vad a reont. Un dra bennak misterius, sakr, a dremen etrezomp. N’hon eus ket ezhomm da c’houzout ar munudoù, evel un dra voutin eo etrezomp.

BARZHEZ ATAV

Evit al levr-mañ he deus Naig Rozmor eskemmet he c’hreion ouzh ur barr-livañ o tiskouez frank, daoust dezhi bezañ paket gant kleñved Alzheimer, eo chomet bev ar varzhez a rae anezhi. “*Al levrig-mañ a lako un nebeud tud da zihuniñ. Lod, moarvat, o deus soñjet n’edon ket amañ ken. Lavaret a raint : “Met, bev eo atav !”*

Valérie Kervella

Naig Rozmor, Les fins dernières d'un poète, Finvezoù diwezhañ ur barzh gant Naig Rozmor ha Chantal Gombert, skeudennaouet gant Jean-Pierre Guiriec, brezhoneg gant Bob Simon. Embannet gant Skol Vreizh (10 € an tamm)

Evit gouzout hiroc’h : WWW.SKOLVREIZH.COM